


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 19 - Gouere 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Emsav ha Kevredigezh	p. 191
"Dremm ar Speredegzh Vrezhon" (arroud)	p. 195
An Emsav hag ar Vro (4)	p. 197
Lizheroù p. 197, Danevelloù obererezh p. 204	
Notennoù armerzhel (16), ar riñverezh armerzhel, I. Goulenn ha kinnig	p. 206

EMSAV HA KEVREDIGEZH

Ur bihanniver eo c'hoazh an Emsav e Breizh ha koulskoude e teu an emsaverion da vezañ prederiet mui-ouzh-mui gant o roll kevredigezhel. Ar roll-se a dermenont evel-henn : genel ur gevredigezh vrezhon nevez. Pouezet hon eus war ar vennadenn-se alies hag e lies doare. Dispis e chom c'hoazh koulskoude e meur a geñver, rak an anaout ned eo ket evit mont pell-tre dirak an ober : pep kammed war an hent a ro d'ar selloù an tu da sankañ donoc'h er c'horn-tro nesañ.

Daou stourm he deus kevredigezh an Emsav da ren en ur ser : stourm an niver hag ar bevder, - ur greizenn a vuhez hag a zedener-ezh e tle bezañ er vro; stourm ar reizhweled hag ar reizhhentañ, - ur pennad mat a hent a chom da ergerzhout hag arabat eo diankañ. Un tamm mat gwalleget eo c'hoazh an eil stourm-mañ gant emsaverion 'zo a gred ez eo a-walc'h ober un dra bennak, forzh petra, evit kas an Emsav war-raok.

Alies hor bez da nac'h ar pezh a anavezomp evit dilenn ar pezh na anavezomp ket c'hoazh, - diouzh poellegezh an Emsav eo se, penaos e vefe nevez a-hend-all ar pezh a reomp ? Un arbenn kreñv eo avat evit ma ve pep kammed war-raok prederiet-mat ha meizet e-keñver an hent a-bezh, en e barzhioù anav evel dianav.

Ha petra a nac'homp er mare-mañ ? N'eo ket didalvoud henn merkañ, ha pa ve evit ardamezañ an hent a gemeromp. Daou seurt hentoù a nac'homp : hentoù treset war zouar Breizh, n'int avat nemet hentoù treuz marc'hadmat na gasont da nep lec'h; hentoù eeun buket ouzh un dazont, un dazont a wechall avat, pezh a ra n'o deus na sol na pal.

Pere eo an hentoù treuz marc'hadmat war zouar Breizh ? Ar re a zo bet anvet hentoù ar gempennouriezh. Dav eo teurel evezh, rak ar gempennourion a c'houlenn hiziv ivez ur gouarnamant e Roazhon, en ur ober anv eus ar Stad Vrezhon. Evel just emaomp a-du evit kaout ur gouarnamant e Roazhon, met n'emaomp ket a-du evit kaout ur gouarnamant

na ouezo nemet kensakrañ ar stad a arallekadur m'emañ pobl Vreizh hiziv. A-enep emaomp da gaout mistri e Roazhon, zoken dizalc'h diouzh mistri Paris, ha dindano an hevelep poblañs ken dic'hoantek da biaouañ ar galloud, ken digizidik ouzh he zonkadur. Rak labour an Emsav zo moarvat prientiñ kemer ar galloud e Breizh, met dreist-holl prientiñ pobl Vreizh da vezañ an Emsav-se a gemero ar galloud.

Pere eo an hentoù buket ouzh un dazont diamzeret ? Ar re a anvomp hentoù an hekleavouriezh. Darvoudoù Frañs nevez'zo o deus diskouezet a-walc'h pegen aes e troe o fenn gant emsaverion 'zo ouzh kan ar morganezed. A-du emaomp evit ma vo gougevanet ar "galloud" armerzhel ouzh ar galloud politikel hag evit ma teuy e kerz Breizhiz an tu hag ar youl da gemer perzh, n'eo ket hepken e buzadoù ar c'henderc'h, n'eo ket hepken en divizoù armerzhel, hogen el levrierezh politikel. Met a-enep emaomp d'en em vagonañ ouzh stlejerezed ar strolladoù politikel gall, - kammhentet a-du-rall war linennoù-tuañ ar gempennouriezh, ha forzh penaos pobl ebet ne c'hell ober he dispac'h evit ur bobl all. A-enep emaomp da blakañ war Vreizh ur vrizhdispac'helouriezh ha n'eus enni a zispac'hel nemet an hunvre da c'hoari en-dro Dispac'h 1917, pe an dispac'h aljerian, kuban, sinaat.

Traoù boutin zo moarvat etre an holl zispac'hioù, en o donañ; hag an dra-mañ da gentañ : pep dispac'h ned eo dispac'h nemet dre ar pezh a zo peurnevez ennañ. Un droienn amoet eo "adober un dispac'h". Rak-se, an dud a vir en o daoulagad furm an dispac'h rusian, pe guban n'int ket evit merzout an dispac'h a zo o kemer furm e Breizh, rak peurnevez eo e furm ha desket e rank bezañ diwar he b-a ba. An Emsav eo an dispac'h-se.

Arabat krediñ ez anavezomp an Emsav. Doareoù darnel zo d'e anaout, met hini ebet, na muioc'h an hollad anezho, ne ro un anaoud-egezh wirion.

Un doare hanezel ez eus, o kinnig deomp un dibun a zarvoudoù, a oberoù, a anvioù hep poell unvanus etrezo; reiñ a ra eus an Emsav skeudenn ur c'horf marv (1).

Un doare daveel ez eus ivez da anaout an Emsav, dre glask e intent diwar-bouez frammoù meizel degaset eus dispac'hioù all, eus obererezhioù politikel all. Mat eo studiañ an dispac'hioù kent, a dra sur. Met petra en deus an Emsav d'ober gant korfoù eskern digiget ar reizhiadoù dispac'hel kozh ? E gorf eskern bev ha lec'hiet reizh en deus ennañ e-unan.

Un doare dangorel ez eus en diwezh. Kement hini a labour en Emsav a c'hounez un anaoudegezh vuhez, korfel anezhañ, a zo ur santidigezh dispis ha kreñv muioc'h eget ur weledigezh spis ha reizh. Mat eo an anaoudegezh-se peogwir e tenn an emsaverion diouti ul lod bras eus o nerzh-kalon hag eus o levenez, met n'eus ket a-walc'h ganti evit gouzout fraezh e pep mare ar pezh a zo d'ober.

Dleout a ra an Emsav bezañ anavezeta er pezh end-eeun a ra dezhañ bezañ an Emsav. E anien dispac'hel a c'houlenn ma ve studiet evel ur furm dibarek, da lavarout eo ma ve tennet anezhañ e-unan ar meizadoù a reer ganto d'e boellat; da heul, ma ve meizet pep devoud emsavel en e geñver gant ar furm dibarek-se.

Dedalvezomp diouzhtu hevelep reolenn d'an dachenn gevredigezhel. An Emsav n'en deus ster nemet e-keñver hollelezh ar bobl vrezhon : da heul e tle bezañ anavezeta en amgant ar bobl vrezhon a-bezh. Moarvat, ent-ergorel, n'eus bet tizhet gant an Emsav nemet kelc'hiadoù strizh eus poblañs Vreizh; dibouez eo evit se ar sellad ergorel-mañ, peogwir ne glot ket gant poell an Emsav a zo dre ret Emsav ar bobl a-bezh. Moarvat, ent-dangorel, ned a ket an emskiant-stroll emsavel en tu all d'ur par korrgantel; eviti da glotañ gant an devoudoù, an emskiant-se a strollig zo da zisteurel, rak n'eus da vezañ reizh diouzh poell an Emsav nemet an emskiant a vroad.

Ha pa veneger ar bobl vrezhon en he fezh, ne veneger ket Breizh-iz hor mare hepken, met pobl vrezhon hor mare ha hini ar remziadoù tremenet. An Emsav zo da vezañ komprenet evel un devoud eus ar gevredigezh vrezhon en hec'h emdrôadur istorel. Un devoud eus an 20th kantved, dezhañ un derou amzeriadus, ez eo evit an hanezour, - un devoud

eus ar bobl vrezhon en hec'h istorvezh a-bezh ez eo evit an emsaver. Ennañ emañ lec'h da gement danvez sevenet gant pobl Vreizh abaoe hec'h amzerioù koshañ; un doare all eo da lavarout emañ ennañ an tonkad brezhon.

Diwar se e rankomp ober un distro war veizad an dispac'h. N'eo ket a-walc'h termenañ an dispac'h evel un distrujañ hag ur c'hrouiñ, - zoken mar roer d'ar c'hrouiñ al lec'h kentañ. Faos eo gwelout an dispac'h evel un distrujañ; ken faos all eo e welout evel ur c'hrouiñ diwar netra.

Amañ ivez e tle c'hoari reolenn ar furm dibarek : n'eo ket diwar-bouez kealioù degaset a lec'h all e c'haller termenañ ar ger krouiñ evel m'en arveromp en Emsav. Da gavout eo e ster evel ma'z eo bet goveliet gant an Emsav e-unan.

Bloaz 'zo (2) hon eus bet tro da ziskouez penaos e voe krouet ar brezhoneg arnevez. N'eo ket diwar netra. Penaos e kejas youl emsavek un nebeut Brezhoned en 19t hag en 20t kantved gant ar pezh a chome a vrezhoneg e stumm teodyezhoù ha skridoù kozh, ha penaos, dre vurzhud an Emsav, eus ar gejadenn etre un dornadig bourc'hizion c'hallekaet hag ur bruzhun a barlantoù displeberet e tisoc'has ar yezh kreñv ha splann a zo hiziv hon hini.

Ar pezh en deus graet e-keñver yezh, emañ an Emsav ouzh henn ober bremañ e-keñver kevredigezh. Kejañ a ra ar youl emsavek ouzh ar pezh a chom eus ar gevredigezh vrezhon kantvedel : ur mesk a stuzegezhioù hiron, hag ivez kement roud a zo war ar paper ha war ar maen eus ar remziadoù tremenet; diwar ar gejadenn e kemero ar gevredigezh vrezhon nevez he neuz.

Un embregerezh nevez zo enta dirazomp. Mont a ra an Emsav war an dachenn gevredigezhel. E gwir, n'eo ket ar wech kentañ ma tro e gammedoù war-du an dachenn-se. Ken abred ha 1929 ez eztaole Roparz HEMON un damant heñvel pa gemenne er pennad diwezhañ eus Ur Brezhon oc'h adkavout Breizh e vefe "muioc'h-mui dalc'het gant al labour kevredigezhel". Hogen boulc'het e voe al labour gouiziel kentañ gant

Maodez GLANNDOUR pa embannas e 1942 : Dremm ar Speredegzh Vrezhon (3). Ar strivadenn gentañ eo ar pennad-se da amparañ un endoniad bev d'an Emsav diwar an danvez kevredigezhel yac'h kafunet er stuzegezhioù, - dres evel ma voe amparet ar yezh vroadel diwar mergl an teodyezhoù. Un hent en deus merket deomp Maodez GLANNDOUR, n'eo ket hentenoù. N'eus hentenn ebet a priori evit ober an dibaboù a roy he dremm d'ar gevredigezh vrezhon nevez. Amañ ivez e ren reolenn ar furm dibarek : ar speredegzh vrezhon hec'h-unan bep m'he dizolomp, a zeu da vezañ hon heñcherez en hon enklask. Met dreist-holl, an Emsav eo a vo dimp lec'h-anaout ha -krouiñ ar gevredigezh nevez diwar-bouez e vuhez kevredigezh end-eeun, - evel ma'z eo bet endeo lec'h-krouiñ ar yezh arnevez diwar-bouez ren e vuhez e brezhoneg.

-
- (1) Sl. An Emsav evel ober hag evel Istor, Emsav 5/105.
- (2) Sl. Lec'h Gwalarn en Emsav, Gwalarn hag ar brezhoneg, Emsav 6/137; Frañsez VALLEE, Emsav 3/58.
- (3) Maodez GLANNDOUR, Dremm ar Speredegzh Vrezhon, Studi hag Ober 18/86 1942.

Dremm ar Speredegzh Vrezhon.

"Moarvat ne'm bije morse klasket resisaat va soñjoù diwar-benn temz-spered ar Vro, mar bije bet nemedon. Rak ne blij ket din lakaat dindan krizder ur sklerijenn daer, traoù re gizidik. Met peogwir e oa goulennet diganin... "Petra eo evit ar spered hag an ene, Breizh a c'hoantaomp adkavout : petra a gavimp, petra a dleomp kavout e penn hor beaj. Tud a vez o lavarout dimp e klaskomp en aner, n'eus ket ur Vreizh speredel : daoust hag e vefe gwir o lavar, pe gaou mezhus en o genou ?"

"Va c'homzoù moarvat a c'hello harpañ hinienoù aet war enklask ar vro. Setu perak em eus o skrivet.

"Na glaskit ket koulskoude en notenoù-mañ ar pezh n'int ket, ur studiadenenn spis, meret klok, met un tamm soñj bennak diwar-benn ur gudenn eus ar re startañ da ziluziañ.

"Rak ma n'eo ket aes displegañ temz-spered pobloù ken anavezet hag ar C'hallaoued, an Alamaned, hag int bet studiet a bell'zo gant pep seurt tud e-leizh, pegen nec'hus ne vefe ket neuze klask displegañ Speredegzh Vreizh, pa ne gaver ket c'hoazh traoù a-walc'h bet savet gant Bretoned emskiantek diwar

o fenn o-unan, pa'z eo bet embannet en enep gant ar Romantelourion kement a sotonioù gros hag a venne hon skeudenniñ.

"Evit gwir, an hini en dije youl da brientiñ ul labour a skiant-vat diwar-benn Speredegzh Vreizh, en dije da gentañ, enklaskoù e-leizh da embreger. Mat e vefe dezhañ, peogwir omp Kelted, mont war studi an henamzer geltiek : ha goude-se, tremen war lennegezh hag arz Iwerzhon, Bro-Skos, Kembre. Nemet eno, pegen aes bezañ touellet : ne anavezomp ar Gelted kozh nemet diwar desteni ar C'hresianed hag ar Romaned, enebourion dezho ha gwall dechet diwar-se d'o brizhskeudenniñ o vrasaat o nammoù. Ha petra zo en ur bobl un tech padus, un doare a-ouenn? Daoust d'an heñvelderioù anat etre Breizhiz, Iwerzhoniz, Kembreiz, pebezh kemm ivez kenetrezo diwar-bouez darvoudoù an Istor, ar Relijion, al levezonoù disheñvel o deus merket warno.

"Evit Breizh e vefe ret studiañ lennegezh ar Grennamzer er vro. Ret ivez sellout a-dost ouzh al lennegezh pobl, ouzh ar gwerzioù, ar c'hrennlavarioù, ar c'hontoù bet dastumet e-pad ar c'hantved diwezhañ : marteze e vefe ar vammenn-se an hini wellañ a c'hallfemp da gaout, ar vammenn sklaerañ bet tarzhet eus hor bro. () Ret eo anzav e kemm ar speredegzhioù evel ma kemm an amzerioù. An Drouized a zo marv, Lug ivez, ha ne zeuint ket en-dro : rak ne dalv ket klask adsevel da vev an diavaezioù aet da ludu, pezh'zo d'ober eo dizoleiñ ar c'hlaouenn speredel chomet dindan, war enaou, hag a c'hell hon entanañ adarre. ()

"Petra eo ur Speredegzh" (). Speredegzh ur bobl eo tro-spered ar bobl-se. Emañ war bazenn ar menozioù fetis. Ur speredegzh pe un all a zo diouzh an dalvoudegezh a reomp d'ar soñj-mañ e-keñver egile en hon buhez; ur speredegzh eo un urzh a lakaer etre gwirionezioù ar bed fetis. Menozioù'zo a lakaomp a-us d'ar re all, a reomp ganto muioc'h eget gant ar re all. Da skouer, an arz keltiek, a ra gant an tric'horn pe ar c'helc'h, ne blij ket dezhañ ar c'harrez : se zo merk ur speredegzh. Ur roll, ur skeuliad a dalvoudegezhioù, anat pe dianav dimp, a implijomp da varn traoù ar vuhez hag ar spered : se zo speredegzh.

"Da skouer, daoust hag e lakaomp ar reiz, ar poell, a-us d'ar galon ? Pa fell dimp ober eus un den, brasañ meuleudi, daoust hag e lavaromp evel ar C'hallaoued : "C'est un homme fort intelligent, c'est un homme extrêmement cultivé" ? Pe un dra all ? Ya, un dra all a lavaromp. Ni a ra gant : "Hennezh zo un den a galon". Ha, pa vefe ar paotr, unan poellek-meurbet, gouiziek-dreist, ma n'eo ket un den a galon, e tec'homp dioutañ, ne reomp stad ebet anezhañ. Ar galon evidomp a zo trec'h war ar reiz er vuhez-mañ."

Maodez GLANNDOUR, Studi hag Ober 18/86-90

A N E M S A V H A G A R V R O (4)

LIZHEROU

"O vezañ ma n'eus e Breizh emskiant pobl kreñv a-walc'h evit ar poent, ne c'hell ket an Emsav tennañ e vad eus an darvoudoù. Gwell ez eo, a soñj din, gortoz ma vo sklaeraet an emgav politikel a-raok adkregiñ gant ar stourm ent-foran. Arabat e vefe ober an hevelep fazi hag e-pad ar brezel pa gemeras an Emsav war ar prim emzalc'hioù a ziskouezas bezañ displetus a-grenn dre ma emdroas ar saviad politikel.

"Kevrenn ebet eus an Emsav ne gemeras savlec'hiadur ebet dirak an darvoudoù nemet an U.D.B. a zegemeras klok savboent an emsavidi, peurgetket e-keñver pezh a sell ouzh diskar de GAULLE ha diazevadur ur veliezh "poblek" er Stad C'hall. Spi o deus paotred an U.D.B. e talc'ho ar gleizidi c'hall ur wech kemeret ar galloud ganto e Paris d'ar mennadoù mat o deus diskouezet kaout a-du gant an emvelestrerezh rannvroel. Evit gwir ar re nemeto o deus embannet o youl war ar poent-se ez eo ar P.S.U. ha MENDES-FRANCE, ma ne fazian ket. Spiañ a ra ivez paotred an U.D.B. o devo ar gleizidi c'hall soñj eus ar sikour a vo bet degaset dezho e-pad an darvoudoù.

"Lavarout ez eo diboell a-grenn seurt goanagoù ha seurt kader-ezh ne vefe ket reizh. O tibab an emzalc'h-se o deus gallet tud an U.D.B. komz eus kudenn Vreizh dirak ar studierion e-kerz ar sizhunioù tremenet. Se n'o dije ket gallet ober anez degemer yezh ar meuriad m'en em gavent en e greiz. Hetiñ a c'haller a-hend-all e kemerfe ar galloud ur strollad evel ar P.S.U. pe tud evel MENDES-FRANCE a seblant bezañ digoroc'h o spered dirak kudenn Vreizh hag an emvelestrerezh eget paotred an U.D.R. pe ar P.C.F. lakaomp.

"Hogen diaes eo nac'hañ daou zevoud a ya a-enep da c'hoanagoù atebeion an U.D.B.. Da gentañ e chom ar P.C.F., war verr dermen da vihanañ, mestr ha rener ar gleizidi e Breizh hag e Bro-C'hall (n'eo ket hepken en abeg da niver ar mouezhioù a c'hell dastum en dilennadegoù hogen en abeg da nerzh e framm). Ma vez savet ur stad sokialour warc'hoazh e Frañs e vo reolet e gwirionez gant ar P.C.F. hervez ar reizhpoell. Hogen enebet krenn eo ar P.C.F. ouzh ar "strolloùigoù" hag al "leskleizidi" a seurt gant ar P.S.U. a vurutell e "reizhveliezh". Ne lezo d'ar re-se eta chañs ebet da astenn o levezon, seul vui a-se da gregiñ e stur ar Stad c'hall. Ha d'an eil, chom a ra ar P.C.F., evit abegoù a hengoun istorel diwar zispac'h 1789 koulz ha diwar hini ar brezel diwezhañ, gelenus [1] a-grenn ivez ouzh an emvelestrerezh, a-du gant ar c'hreizennerezh. Ar gwashañ zo, izili ar P.C.F. e Breizh, deuet

[1] Gelenus ag., o tiskouez enebouriezh.

kalz anezho da vare an eil brezel bed, a zo muioc'h gall eget komunourion Paris : nac'het o deus da skouer, war zigarez ez ae re bell, ur raktres breizhat a oa bet aozet e burevioù Paris gant izili mererezh-kreiz ar P.C.F..

"N'eus forzh peseurt disoc'h a vo d'an darvoudoù a vremañ ne c'hallo na Breizh nag an U.D.B. gounit kalz tra diwarnañ. Ma vez trec'h de GAULLE hag e gostezenn e kendalc'hint gant ar politikerezh skarzhañ o deus boulc'het er vro-mañ (daoust m'eo c'hoarvezet gant de GAULLE nevez zo menegiñ ar "rannbarzhioù" e Lyon daou viz hanter 'zo da skouer, hogen en armerzh e soñje hepken ne vern penaos hag en dro-mañ adarre e ve da anavezout ment e c'halloud gwirion er Stad c'hall). Ma vez trec'h ar gleizidi hag ar gomunourion n'eus netra da c'hortoz kennebeut : dre o hengoun ez eo gall ar gomunourion c'hall ha, war ar marc'had, e rankint derc'hel kont eus hengoun an dispac'h gall kentañ pa gendalc'has ar Republik gant ar politikerezh kreizennañ hag aloubiñ a oa bet hini ar rouaned c'hall.

"Ne vije ket tu kennebeut d'en em glevout gant ar "strolloù-igoù" m'o dije, - pezh a oa dic'hallus, - kemeret ar galloud er Stad c'hall. Ar re-mañ n'o deus bro ebet hag a zistaol pep hengoun. Kaer en devo ober e ranko ur broadelour a gleiz pe a zehou en em glenkañ en istor e vro. Echuiñ a ran o lavarout n'eus ket da hetañ ma ve roet da gudenn Vreizh ur falsdiskoulm ha na rafe nemet kuzhat gwir natur ar gudenn-se. Er c'heñver-se e c'hell un emvelestrerezh profet d'ur mare ma n'eus framm broadel ebet mirout ouzh Breizh a emouezañ ervat ouzh he broadelezh ha bezañ noazus eta a-benn ar fin." (14 06 68)

EMVR-24

"Setu ar yoc'h o peuriñ en-dro dindan gammell he bugul. Un trec'h heñvel en dije bet an tu kleiz m'en dije gouezet kemer ar galloud e koulz. ()

"Kaout a ra din ez a war zisteraat pouez ar bruderezh ha war greskiñ pouez an ensavadurioù evel binvioù war ar meno foran. Ar bruderezh a glask diorren ur poell bennak e spered an dud, hep kaout an disterañ krap war o buhez, - klask a ra 'darbwylllo'; met an darn vuiañ eus an dud e Frañs hag e Breizh pergen n'int ket gouest da ziorren ur poell en o spered; hag ar bruderezh neuze a rank mont d'an tunioù, d'al lorbiñ, ar pezh a denn digantañ pep nerzh gwirion. An ensavadurioù er c'hontrol a dizh an dud en o buhez, o nerzh eo hini ar poell a zo er vuhez end-eeun. Trec'h de GAULLE zo trec'h an ensavadurioù, bet lakaet en arvar ha stabilaet ur wech ouzhpenn gantañ. Nerzh an tu kleiz zo nerzh ar c'hweluniadoù, ensavadurioù renkadel, ha nebeut-tre nerzh ar strolladoù evel strolladoù-brudañ.

"Kentel hon eus da dennañ, a gredan, eus an devoud-se. Fall eo ar c'haderezh a ve anezhañ brudañ ur strollad-brudañ gant ar spi e teuy kreñv a-walc'h evit kemer ar galloud gant harp ar boblañs. Hor bruderezh a zle brudañ an ensavadurioù a grouomp, a-benn degas

tud nevez dezho, - an hent hon eus kemeret e gwirionez. Ur fazi e ve evel just brudañ an ensavadurioù en o devoud, ha n'eo ket en o fal." (24 06 68)

EMVR-25

"Emaon o skrivañ al lizher-mañ daou zevezh war-lerc'h ar vouezhiadeg e Frañs. Ne ouzon ket mat, anat, petore disoc'h dibenn a vo goude an eil devezh mouezhiañ. Kentelius e c'hell bezañ evidomp avat ober gant sifroù ar mouezhioù pa na ve nemet evit merzout splannoc'h penaos emañ ar gont gant ar Vretoned, sellout ouzh o dibab e-keñver ar c'hostezennoù klasel e Bro-C'hall, tu-dehou ha tu-kleiz. Gouzout a ran ervat e lavarer alies bremañ ez eo war-lerc'hiet un hevelep dasparzhadur. Padal e kav din e vir c'hoazh un dalvoudegezh vras evit a sell ouzh ar re arallekaet, eleze ouzh hon holl genvroiz pe dost : dre vras e tiskouez preder an urzh ouzh preder al largetez; anat eo ez eo re eeun un hevelep diderm-enadur, met kavout a ra din n'eo ket peürfaos. Setu perak e lakaan emañ a-is : 1. Niver an enskrividi 2. Niver ar vouezhierion 3. niver ar mouezhioù U.D.R. 4. Dregantad 3/2 5. Niver ar mouezhioù C.P.D.M. (mui unan "Réforme" e 29/4) 6. Dregantad 5/2 7. Dregantad 4 + 6 8. Dregantad an dilerc'h, eleze an tu-kleiz (mui "Front Breton" h.a.).

	1	2	3	4	5	6	7	8
22	325 211	273 389	81 162	29,9	70 816	25,9	55,8	44,2
29	492 406	402 063	193 888	48,3	86 503	21,8	70,1	29,9
35	379 980	309 461	165 904	53,7	53 873	17,4	71,1	28,9
44	479 857	388 945	200 673	51,8	45 312	11,6	63,4	36,6
56	324 613	267 493	153 470	57,5	37 581	14,0	71,5	28,5
H.2	012 067 1741 351	795 097	45,6	294 085	16,9	62,5	37,5	
Frañs			43,6		15,1	58,7	41,3	

"Ac'hann e c'haller dezastum :

1° Ez eo hogos kevatal "Bretoniri" ha Frañs, nemet e hañval an "tu-dehou" bezañ un tammig kreñvoc'h e "Bretoniri" eget e Frañs (gant "Bretoniri" e fell din lavarout Breizh er framm frañsat, evel reizh);

2° Ez eo an "tu-dehou" e Bretoniri 1,7 gwech kreñvoc'h eget an "tu-kleiz".

3° Ez eus 87,1 % a vouezhierion (mouezhioù talvoudek) e Bretoniri, a-enep 78,6 % e Frañs.

"Kalonekaus eo 3° a ziskouez ez eo prederiet ar Vretoned gant kudennoù ar geoded, - ha pa ve, diouzh hor savboent, ur vrizh-keoded, - kalz muioc'h eget ar Frañsad keitat; diouzh un tu all e tiskouez ivez pegen kreñv eo ar framm gall en hor bro.

"Diwar 2° e c'haller dezastum ivez ez eo ar Vretoned tuet kalz muioc'h trema an "tu-dehou" eget trema an "tu-kleiz".

"Diaes eo gouzout, evel reizh, penaos e vouezhias ar Vretoned

en harlu. Setu da skouer disoc'h ar vouezhiadeg e 15^t kombod Paris (14^t arondisamant Petit-Montrouge, Montparnasse, Montsouris) a ve, hervez, ouzhpenn 50 % a Vretoned o chom ennañ :

50 848 39 453 18 543 47,1 8 173 20,7 67,8 32,2

"Amañ ivez e weler un dregantad bras a vouezhioù evit an tu-dehou, ha se en ur c'hombod tudet gant micherourion dreist-holl.

"Gouzout a ran e ranker ober e lod da "strollad ar spont". Chom a ra avat ez eo dehouat hor poblañs. Padal e lennan en Emsav 17, e taoler evezh bras ouzh ar pennadoù embannet e kazetennoù gall eus an tu kleiz a ziskouez bezañ mui pe vui tuet davedomp. Ne glemman ket evit se, rak ur skor eo evidomp zoken pa zeu eus enebourion treitour d'o bro. Goulenn a ran ouzhoc'h avat perak n'eus bet graet anv ebet ganeoc'h eus ar pennadoù ken niverus all bet savet er c'hazetennoù gall eus an tu-dehou (Rivarol, Minute, l'Aurore, Monde et la Vie, h.a.) : eno ivez hon eus kavet pe Frañsizion o labourat a-enep da anien o Stad, pe Bretoned o tamglevout adarre galv o bro : a-walc'h e vo din menegiñ anvioù Sérant, Mabire, Brigneau, Pleyber. Gwall alies e hañval bezañ Emsav tuet war-du an "tu-kleiz". Marteze a-walc'h ez eus amañ damouezh eus soñjezonoù un darn eus ar genlabourerion.

"Fellout a ra din tennañ hoc'h evezh ouzh ar c'hraf-mañ :

1° Un dornadig omp e Breizh o vezañ Brezhoned ha neket Bretoned hepken ha gwall-ziaes e vo dimp gounit hor pobl d'hor mennozioù, e c'houzout a rit kenkoulz ha me.

2° Dehouat eo hor poblañs.

"Neuze en hoc'h atersan () : petra eo ar meni mazokelezh-se hag ho laka da c'hoantaat bezañ bihanniver ur bihanniver ? Ha ne gav ket deoc'h ez eo diaes a-walc'h evel-se an emgann pe e fell deoc'h ho tispartiañ a youl kaer diouzh nemorant hor c'henvroiz ?"

(25 06 68)

EMVR-25

E/EMVR-25.- Trugarekaat a reomp hor c'henskriver evit ar sifroù a ro deomp hag e evezhiadennoù.

Kentañ goulenn a reomp avat eo hemañ : petra eo "bezañ a-zehou" ha petra eo "bezañ a-gleiz" evit poblañs Vreizh ? Hag-eñ ez eo un dibab emouiziek da vezañ komprenet evel ur mennadur a-zivout aoz ar gevredigezh, tonkad ar vro hag an denelezh ? Pe un devoud da vezañ komprenet evel disoc'h ur c'hoari gwikefreoù bredoniel ha kevredadoniel hep nemeur a zarempred gant nep emouiziegezh politikel ?

"Bezañ a-gleiz", "bezañ a-zehou" e Breizh zo patromoù stuzegezhel gall, nemet e klot moarvat gwelloc'h ar patrom "bezañ a-zehou" gant arallekadur ar Vretoned, - an diouer a youl politikel o kavout gwelloc'h kempouez gant ur gouarnamant aotrouniek. Heñveldra, dregantad uhel ar vouezhierion zo diaes da gompren evel un azon a skiant keodedel pa weler an digaloned keodedel a ren e pep lec'h e Breizh a-hend-all; klotañ a rafe

er c'hontrol ervat gant trolinenn gevredadel ar Breizhad arall-ekaet, eleze yoc'hekaet : ar gouarnamant gall en deus sachet gantañ al lod a levezon bet kollet gant ar gloer; met, forzh penaos, ar gouarnamant hag ar veleion a sav a-du war ar poent-se ha n'o devez poan ebet o sankañ er yoc'h keal an "dlead keodedel", ar mouezhiañ, h.a.

Evit a sell Emsav hag an Emsav dre vras, ar pal kemeret zo krouiñ ur gevredigezh nevez e Breizh. Roll Emsav zo termenañ an embregerezh-se. Mar'd eo he c'helennadurezh politikel ur gelennadurezh dispac'hel, mar menn teurel diazezoù ur gevredigezh kevarzhel, n'eo ket a dra sur dindan levezon ur strollad gall bennak. Mar kav mat kleiziz c'hall ober kleiziz ac'hanomp ha treiñ "kevarzhel" dre "socialiste", n'hor bo nec'hañs ebet. Pep hini a ra gant e ventel. Hor mentel deomp-ni hon eus ivez, ha n'eo ket gant ar patromoù gall, a gleiz pe a zehou, eo e vuzuliomp hor politikerezh; mar c'hoarvez deomp muzuliañ ar politikerezh gall gant hor mentel, - neuze, bezet hor c'henskriver frealzet, ne droomp ket bepred "socialiste" dre "kevarzhel", na "de gauche" dre "dispac'hel".

Ezhomm hon eus gouzout ha kompren betek pelec'h ez a levezon ar mennozioù dehouat ha kleizat gall war boblañs Vreizh, met ur fazi e ve krediñ e vast ar patromoù stuzegezhel-se d'hec'h ezhommoù a vuhez politikel gwirion, - ra sello hor c'henskriver ouzh ar rannbennad : Ar framm hag ergoreladur an ezhommoù (Emsav 14/35). Dre emzalc'h Breizhiz war an dachenn bolitikel er framm gall e c'hell an Emsav anaout stad o arallekadur hogen tamm ebet o ezhommoù politikel.

A-hend-all, evit un abeg eeun eo n'eus ket anv e-barzh Emsav eus kelaouennoù an tu dehou gall : ne vezomp ket o selaou a-hed an amzer ouzh ar pezh a soñj ar C'hallaoued diwar-benn Breizh hag an Emsav. Komzet hon eus eus pennad an Nouvel Observateur dreist-holl en abeg d'an heklevioù en doa bet er boblañs, da lavarout e studiemp aze muioc'h un devoud kevredadel brezhon eget un oberenn c'hall.

"Lennet em eus niverenn diwezhañ Emsav a zo fetisoc'h eget boaz, en abeg d'an darvoudoù : dedennet on dreist-holl gant ar c'hudennoù pleustrek. Plaenadur levr HERAUD [EMVR-20] am eus lennet gant evezh (). Dre vras eo reizh pezh a zo displeget, hogen difetis e kavan ar ger krouiñ (krouiñ petra ? krouiñ n'eo ket ur verb diren) ha dañjer ar savlec'h kemeret eo dres an didelezh rak unan a gredfe a-walc'h e c'haller krouiñ n'eus forzh petra e n'eus forzh pelec'h e n'eus forzh peseurt amzer. Ha war ar marc'had e lenner er pennad-digeriñ ez eo prest ar 'grouerion' er vro-mañ da vont da 'grouiñ' e lec'h all, en ur vro all, ma ne c'hellont ket krouiñ er vro-mañ. Evel ar Gall DEBRAY a zo aet d'ober an dispac'h e Bolivia peogwir ne oa netra d'ober e Bro-C'hall ! Evidon-me, dre ma'z on broadelour dres ne c'hallan krouiñ

netra er-maez eus an douar-mañ. ()

"N'eus bet un dispac'h 1917 nemet e Rusia evel ma n'eus bet un dispac'h 1789 nemet e Bro-C'hall hag ur Sizhun Fask nemet en Iwerzhon. E pep bro ez eo an istor da ijinañ a nevez penn-da-benn. ()

"Me 'gav din e rit mat o lavarout ez eo barnet ar stuzegezh kozh da vont da get n'eus forzh penaos peogwir n'eo ket harpet gant Stad ebet. Hogen n'hoc'h eus ket stignet mat ar gudenn. Seblantout a rit krediñ a priori ez eo dreist ar sevenadur a-vremañ d'ar stuzegezh henvoazel a-wechall (pa n'he doa ket ar Stad nemeur a levezon war vuhez an dud). Ma ned eo hor roll avat nemet lakaat Breizhiz da dremen eus ar marevezh rakgreantel d'ar marevezh greantel, perak chom hep lezel ar roll-se d'ar Stad C'hall pe d'ur Stad all ? A-benn ar fin e tisoc'her evelato d'ur gudenn divezel : perak e tle bezañ ar pezh a savimp dreist d'ar pezh a zo bet savet gant ar C'hallaoued ? E Breizh, da vihanañ, diouzh ma oa awenet ar stuzegezh gant sevenadur ha framm an Iliz e oa un elfenn dalvoudus enni. Evit petra eo graet mab-den a-benn ar fin ? Daoust ha ne gav e finvez nemet er gevredigezh hag er Stad ? Ret e vefe gouzout hag-eñ ez eo ar re-mañ finveziou pe duioù hepken. A-hend-all e kav din ne ziboufimp nemet war ur stadazeulerezh nevez.

"Evit lavarout ar wirionez ne gredan ket e c'hellomp poellekaat penn-da-benn hon ober (). Lakaomp a-hend-all e teufemp a-benn da boellekaat penn-da-benn hon ober, c'hoazh e vefe ret deomp-ni bezañ mestr warnañ penn-da-benn. Hogen n'eus netra asur er politikerezh ha gwariet e vez bepred ober an oberourion. Mennoziou Lenin a oa reizh hepken peogwir en deus graet berzh met n'en deus ket graet berzh peogwir e oa reizh e vennoziou en a-raok. N'eus nemet degouezhennoù dibar en istor. ()

"Da skouer, gant peseurt keal eo bet awenet an didrevadennadur en Afrika ? Ne oa ket marksourion ar re a zo bet kiriek da bep tra, blenierion emsavadeg Algeria; ne oant ket broadelourion evelomp kennebeut. Neuze, perak int deuet a-benn ? ()

"A-benn ar fin setu penaos e c'haller poellekaat hon Emsav. Da gentañ arabat eo barn penn-da-benn ar stuzegezh henvoazel (). D'an eil, ar Stad arnevez sokialour pe gevalaour zo arallekaus dre natur (en abeg d'he ment pergen). Mat eo eta sevel Stadoù a vent vihan a seurt a c'hallfe Breizh bezañ. Dres avat ez eo gallus an dra-se e Breizh en abeg d'an aspadenn a emskiant vroadel a zo enni. Ret eo tremen eus an hetadus d'ar gallus hogen ar gallus a zo a-bouez ha rak-se, en abeg d'an uhelbal a vukomp outañ, e c'hellomp tamall ar C'hallaoued dre ma klaskont lazhañ e Breizh kroueell ur wir vroad. Gwerediñ hag efediñ a rankomp evel just a-raok goulenn n'eus forzh petra, hogen ne c'hellomp ket krouiñ diwar netra." (27 06 68)

EMVR-26

| E/EMVR-26.- Ar gudenn zo evit HERAUD pelec'h diazezañ ar gwir
| o deus ar broadoù suj da vevañ disuj. Respont HERAUD zo : e

natur an traoù, da lavarout eo en ur stroll perzhioù a zo d' an dud hep na rafent netra evit o c'haout, hep n'o defe netra retoc'h d'ober ganto eget o diwall.

An diazez evidomp n'emañ ket en un natur, met en ur c'hevala (o reiñ d'ar ger ar ster hollek hon eus termenet meur a wech c'hoazh), hag en ur c'hevala istorek, - da lavarout eo er pezh he deus krouet hor pobl a-hed he c'hantvedoù hag a zo ganimp hiziv evel danvez ha binvioù hor c'hrouiñ deomp-ni.

War ar ger "krouiñ" end-eeun e tegas hor c'henskriver an dael. "Krouiñ a c'haller forzh petra", emezañ. Daou respont ez eus d'an abegadenn. An eil er par hollek : an hevelep abegadenn zo d'ober d'ar rezid, mar he c'homprenner evel ar goar d' ober forzh petra. Krouiñ zo un anv all d'ar rezid. Ouzh lakadenn ar c'hrouiñ ez eneb HERAUD, ha marteze hor c'henskriver pa gomz eus "aspadenn vroadel", lakadenn ar mirout. Met outo e c'haller ivez treiñ o abegadenn : mirout a c'haller forzh petra. Kement-mañ hon degas d'an eil respont, a zo hemañ : diskoulmet eo ar c'hevenebadur "petra krouiñ ?" "petra mirout ?" hag an diskoulm zo bet degaset gant an Emsav e-unan, n'eo ket en ur stumm kealiek difetis, met war an dachenn, en ur stumm istorek fetis. Anat eo ne zivizer nepred en a-raok petra krouiñ ha petra mirout. Hag amañ e savomp a-du gant hor c'henskriver : nevez e vez bepred an istor, - nemet ne asantomp ket da sellout outañ evel amoet evel ma ra SARTRE da skouer, hag evel ma rafe a-walc'h hor c'henskriver pa gomz eus "reizhder" mennozioù LENIN, met aze n'emañ ket an dalc'h. "Mont a ran war-raok hag e welan" a lavare LENIN end-eeun. Aet eo an Emsav war-raok hag en ur ober se en deus krouet ha miret. An argerzhad-se hon eus dezrannet o studiañ istor Gwalarn (sl. Emsav 6/138-9). An Emsav en deus miret ar brezhoneg, ha krouet ar brezhoneg arnevez. Furm an diskoulm a glaskomp hon eus da studiañ el lec'h m'emañ, da lavarout eo en istor an Emsav. Ar ger "bro" da skouer zo miret evel m'emañ abaoe kantvedoù; padal, dre an Emsav ez eus deuet un dalvoudegezh nevez dezhañ, - un dalvoud-egezh ha n'eo ket bet dibabet ent-tidel, met a zo frouezh ar strivoù, an oberoù, an emgannoù a ra istor an Emsav, hag e-se ez eo lodek e kevala istorek Breizh.

N'eo ket hepken ar yezh a heuilh an hent-se, met kement tra a ra buhez ar vro : ar stuzegezh, an darempredoù kevredigezhel, aoz ar glenn zoken, - adkavout a reomp lod eus an elfennoù renket gant HERAUD e-touez e azonoù-diforc'h. An dremm o deus ar remziadoù tremenet roet da zouar ar vro, ar vedouriezh hag ar vuhezouriezh brezhon emleget gant heuliad ar stuzegezhioù, - ar speredegezh vrezhon, - zo danvez prizius dimp. Pe gentoc'h n'int danvez prizius dimp nemet mar deuont da vezañ danvez oberiek d'o zro ganeomp, - kevala istorek. A-hend-all e chomont en ur stad a natur, a zanzev blin, hag e steuziont abred pe ziwezhat.

A-du emamp gant aozer al lizher pa nac'h lakaat uheloc'h

ar stuzegezhioù lavaret arnevez pe c'hreantel eget ar stuzeg-
ezhioù henvoazel, rakgreantel. E gwirionez, hon eus pouezet
kalz en Emsav war ar gudenn-se, n'eo ket peogwir e vennfemp
bezañ abostoled ar Reverzhi C'hreantel pe nep reverzhi all,
met en abeg d'an tezennoù faos a ren e Breizh hag e lec'h all
a-zivout ar stuzegezhioù hag anien ar stuzegezh. Ne stourmomp
evit stuzegezh ebet; pa garfemp henn ober, ne c'hallfemp ket,
peogwir ne anavezomp ket ar stuzegezh a zisoc'ho eus trec'h
an Emsav e Breizh.

Emsaver eo hor c'henskriver ha setu perak ne c'hell ket ken
bremañ divroañ ha mont da grouiñ e lec'h all. Hag-eñ ne wel
ket avat an niver a Vrezhoned a fellas dezho seveniñ un dra
bennak hag a rankas divroañ peogwir n'edo ket ar c'hevala ret
en o c'herz e Breizh? Pet Brezhon zo e Paris o kenstrivañ gant
ar C'hallaoued da gas ar sevenadur gall, an armerzh gall, ar
politikerezh gall war-raok ? Pa ne oa ket Breizh evit reiñ
dezho ar c'hevala istorek o doa ezhomm evit ren o buhez-krouiñ,
hag-eñ hon eus da skeiñ mein ganto ? Roll an Emsav zo dres
lakaat e stumm danvez-krouiñ kement glad denel a zo er vro.

"An holl zarvoudoù c'hoarvezet e miz mae e Breizh a ziskouez
ur wech ouzhpenn n'eus tu ebet da ren un emsav bennak hep ur
gelennadurezh resis diazezet mat en a-raok. Gwelout a reomp ivez
neuze pegen kreñv eo ar mennozhioù nevez e diabarzh an Emsav,
daoust ma'z omp nebeut a dud evit ar mare. Hogen, dre ar gelenn-
adurezh eo ret kregiñ." (05 07 68) EMVR-27

DANEVELLOU OBEREREZH

Digant ur c'helenner eus Kelc'h Debauvais Roazhon

"Tost echu eo ar bloavezh-skol e Kelc'h Debauvais. Er seizh
klas e vo bet graet etre 22 ha 40 kentel a un eurvezh hanter pep
hini. E-touez ar skolidi deuet da zeskiñ brezhoneg e derou ar
bloaz e teuio 10 % da Zevezhioù Studi Eost. Da lavarout eo 10 %
eus ar skolidi enrollet e Kelc'h Debauvais o deus spurmantet ne
oa ket deskiñ brezhoneg ur pal drezañ e-unan.

"An niver-se a hañvalo bezañ kalz da dud'zo ha nebeut da dud
all. Evit barn an disoc'h avat e rankomp gwelout piv a zo deuet
pe, kentoc'h, penaos eo deuet ar skolidi. Evel ma'z eo bet resis-
aet amañ c'hoazh n'hon eus ket lavaret en hor bruderezh muioc'h
eget : "deuit da zeskiñ brezhoneg", hag a-wechoù : "ur yezh arnev-
ez eo". Ha gwelet hon eus e oa ur bern tud a felle dezho deskiñ
brezhoneg, - met ne oa ket se ar pal. 10 % eus ar re o deus en-
skrivet e Kelc'h Debauvais a soñje, pe a zo deuet da soñjal e-doug
ar bloavezh, ne oa deskiñ brezhoneg nemet ur bazenn gentañ. Ar re

a zo deuet da Kelc'h Debauvais a oa kizidik ouzh ar yezh en un doare pe unan all, ar re a zo chomet a oar ez eo kudenn ar yezh ur gudenn bolitikel, stag ouzh ar gudenn armerzhel hag ouzh kudennoù all Breizh. Ar re a zeuio d'an Devezhioù Studi eo ar skolidi hon eus gallet kejañ ganto er-maez eus ar c'hentelioù.

"Ouzhpenn kelenn brezhoneg hon eus klasket reiñ d'ar skolidi un alberz eus hanez Breizh hag eus istor an Emsav. E miz genver ez eus bet aozet ur c'houlennadeg evit anaout ar skolidi, gouzout ar pezh a felle dezho ober. An darn vuiañ a felle dezho anaout Kelc'h Debauvais hag aozet ez eus bet emvodoù e galleg en amboazse. Eno hon eus gallet kejañ ganto pe kentoc'h gant an 10 % anezho a zeuio d'an Devezhioù Studi.

"Evel ma'z eo bet lavaret c'hoazh ez eus bet klasket tizhout dreist-holl tud kizidik ouzh ar yezh. Ur fazi a reer alies en Emsav eo hemañ. An emsaverion o deus desket brezhoneg a zalc'h soñj eus ar pezh o deus komprenet goude deskiñ brezhoneg. Ur wech desket brezhoneg ez eer kalz buanoc'h war-du an Emsav peogwir ec'h en em denner aesoc'h diouzh ar meizframm gall ha peogwir e kaver e brezhoneg ar studioù-diazez gwellañ diwar-benn Breizh. Zoken, pe dreist-holl, ar re ac'hanomp a zo o paouez deskiñ brezhoneg a zo techet da zisoñjal o deus daelet da gentañ e galleg gant tud an Emsav. Anez bezañ dedennet gant ar yezh pe gouzout petra eo ur yezh ne gendalc'ho ket ur skoliad da zeskiñ brezhoneg ma ne grog ket war un dro da anaout labour an Emsav war an holl dachennoù, labour politikel an Emsav. Adalek an deiz kentañ e rank ar skolidi gouzout n'eo ket Kelc'h Debauvais ur "maison de la culture" arbennikaet war ar brezhoneg.

"Mui-ouzh-mui e teu tud e Breizh da vezañ emouez ouzh enkadennoù ar vro, mui-ouzh-mui e kompren Breizhiz ez eo dezho da ziluziañ kudennoù o bro. Kudenn hor bruderezh e Kelc'h Debauvais a vo o lakaat da zegemerout ez eo Breizhiz o-unan a rank kemm, a rank bezañ diarallekaet hag ez eo ar brezhoneg ar benveg gwellañ evit henn ober. Ezhomm en deus an Emsav eus tud mennet da labourat evit diluziañ kudennoù pobl Vreizh kement hag o deus Breizhiz ezhomm eus ar brezhoneg hag eus an Emsav da adsevel o bro.

"Ar skolidi a zeuio d'an Devezhioù Studi o deus kejet gant hiniennoù eus an Emsav. Komzet o deus eus ar gelaouenn Emsav, eus emsavadegoù ar gouerion, eus tarzhadennoù an F.L.B., koulz hag eus o micher, eus o doare-bevañ. Evit 10 % eus ar skolidi ez eo Kelc'h Debauvais ouzhpenn ur skol hag an Emsav ouzhpenn levrioù ha mennozioù. Tud eus an Emsav o deus anavezet.

"Evit 10 % eus ar skolidi ez eo bet Kelc'h Debauvais an nor a zigor war gevredigezh an Emsav. Dont a raint d'an Devezhioù Studi ha chom a ra dimp da vezañ gouest da ziskouez dezho diazez ha dremm dispac'hel an Emsav o lakaio tamm-ha-tamm da zibab kemer perzh en hor stourm, da vezañ lodek e kevredigezh an Emsav."

N O T E N N O U A R M E R Z H E L (1 6)

AR RIÑVEREZH ARMERZHEL

I. GOULENN HA KINNIG

Talvoud ha gwerzh.

Daou ster en deus ar ger talvoud. Anat int e troiennoù al lavar : "Va zi a dalvez din da annezañ", "Al levr-mañ, bet da F.VALLEE, en deus evidon un talvoud bras"; "Pegement e talvez an tangarr-se ?". Diouzh un tu e seller ouzh an dra evel o walc'hañ un ezhomm, diouzh an tu all evel kevatal d'ur yalc'had arc'hant. Alese an daou dermen : talvoud-bastañ, talvoud-eskemm.

An talvoud-bastañ, pe talvoud ar madoù evel bastusterioù (1), zo talvoud an dra e kement ha ma walc'h un ezhomm, ha ma ro e c'hoant d'un hinienn. Emplegañ a ra ur c'heñver eeun etre an den hag an dra.

Hogen an traoù ne dalvezont ket hepken da walc'hañ ezhommoù eeun an dud. Eskemmet e vezont ivez, eleze gwerzhet. Gwerzhet e c'hell bezañ an dra e-unan pe hepken an arver, an talvezadur (2) anezhañ. Ganet e vez e-se un talvoud all, an talvoud-eskemm. An talvoud eskemm a vez bepred niverel, peogwir ez eo dre ret ur c'heñver niverel etre an traoù, - ho pet soñj (3) : mar talvez ur maout kant pesk, h.a.. Ur werzh eo enta. Emplegañ a ra keñverioù kemplezh : keñverioù dewerzhadur niverel etre an traoù, evel m'hon eus merket, hag ivez keñverioù kevratel etre an dud; evit ma tiwanfe an talvoud evel gwerzh, e rank bezañ da nebeutañ daou zen : ur gwerzher hag ur prener. Robinson Crusoe a dennas boued ha binvioù eus e vag peñseet, met dilezel a reas ar pezhioù moneiz : gant ar re gentañ e oa talvoud-bastañ, gant an eil re ne oa nemet talvoud-eskemm, - didalvoud e oant neuze d'un den digavandenn. MARX (4) a verk e ra o gwerzh ul lavar eus ar marc'h-adourezhioù, ul lavar teñval oc'h aloubiñ an darempredoù kevredigezhel, andon a arallekadur. Va zi a c'hallan gwerzhañ; paouez a ra neuze a vezañ ti din evit bezañ troet en e werzh arc'hant. Gwerzhañ a c'hallan ivez, n'eo ket va zi, met an talvezadur anezhañ, eleze e feurmiñ; an talvezad, pe feurm, a vo ur werzh ivez : va

zi, daoust ma vo din c'hoazh, a gollo pep talvoud-bastañ evit kaout hepken un talvoud-eskemm, ur werzh; e dalvoud-bastañ zo aet e kerz unan all. Treiñ an talvoud e gwerzh, ar gwerzhekaat, a vez bepred enta un arallekaat.

N'eo ket hor mennad amañ degas ar gudenn-se war dachenn an divezouriezh, dav eo koulskoude termenañ resis kealioù an talvoud hag ar werzh ha, daoust ma chomont alies kemmesket el lavar boutin, merkañ mat al lec'h o deus e studi an armerzh : gant ar werzh, hag ar werzh hepken, e pled an armerzhouriezh pe, da nebeutañ, ar rihverezh armerzhel a studiomp en notennoù-mañ.

Ar priz

Keñverel eo ar werzh : ne c'haller ket merkañ gwerzh un dra hep ober dave, ezplegat pe emplegat, d'ar marc'hadourezhioù all. Gant diwerzhekadur ar moneiz avat ez eus ranket sellout ouzh daou seurt gwerzh : ar werzh werc'hel, talvoud-eskemm gwirion, keñverel, hag ar werzh verkel, a zo un niver na ra ket dave war-eeun d'an talvoud-eskemm, - ar priz eo. An holl brizioù a c'hell kreskiñ pe zigreskiñ war un dro, - keñverit ar prizioù e 1918 hag ar prizioù e 1968. An holl werzhioù avat ne c'hellont ket. Mar tremen priz ar bara eus 1 lur da 10 lur ha priz an amann eus 3 lur da 150 lur, ez eus kresk war an daou briz, kresk war werzh an amann, digresk war werzh ar bara.

Penaos e vez merket o gwerzh d'an traoù ?

Pe, evit ober gant ul lavar pleustrekoc'h, penaos e tinod ar prizioù ?

Meur a zamkaniezh ez eus bet. An damkaniezhoù ergorelour (Karl MARX) a sell gwerzh an dra evel kevreizh da goust ar c'henderc'hañ, eleze d'al labour graet evit kenderc'hañ an dra. An damkaniezhoù dangorelour (CONDILLAC, armerzhourion aostrian an 19^t kantved) a vez ar werzh evel ereet ouzh ar vastusted. Ezhommoù pe c'hoantoù ar vevezerion eo a zidermen o gwerzh d'ar marc'hadourezhioù.

An armerzhourion arnevez a zistaol a priori kement poellatadur a wel ur penndevoud hepken d'ar werzh. Kemer a reont yezh ar jedoniezh. Ar werzh, emezo, priz ur varc'hadourezh zo unan e-touez an dianavennoù eus reizhiad an ataladoù o teluniañ kempouez an armerzh. Ned eo ket devoudet na gant koust ar c'henderc'hañ, na gant c'hoant ar bevezer, na gant kementad ar varc'hadourezh, met gant an holl elfennoù-se a-gevret, hag ouzhpenn gant un niver bras a re all : gwerzh ar marc'hadourezhioù all, ar goprou, feur ar c'hamp, an helvoù, al leveoù, h.a.

Amañ emañ diazez ar rifverezh armerzhel : savelañ ha diskoulmañ an ataladoù ez eo ar priz unan eus an dianavennoù anezho.

Ar goulenn.

Evel a ouzomp, ez eo ar goulenn unan eus div elfenn an nevid. Ar goulenner en deus ezhomm eus ur mad, hogen klask a ra e gaout evit ar priz izelañ gwellañ. Ar c'hinniger en deus ezhomm gwerzhañ ar mad, hogen klask a ra kaout ar priz uhelañ gwellañ anezhañ. Ur breutadur zo enta etrezo, o klozañ, en dro vat, gant ur gevrat.

Daou zoare zo da veizañ ar ger goulenn : ar goulenn evel barr-egzh, a reer anezhañ ar goulenn-barr (sk.: pa sav ar barr-bevañ e kresk ar goulenn, da lavarout eo e c'hoantaer muioc'h, e vezer barrek da brenañ muioc'h); ar goulenn evel feur ar c'hementadoù goulennet ent-devoud, a reer anezhañ ar goulenn-read (sk.: ar goulenn zo tremenet eus 100 g da 200 g kig dre zen bemdez). Er ster-mañ diwezhañ e tosta ar ster da hini ar ger bevezadur, - setu perak e vez lavaret kenkoulz goulenn ha bevezadur, goulenner ha bevezer, h.a.

Amprestet eo bet ar gerioù barr ha read digant an dredanourion, an tredanvarr o vezañ ar "varregēzh" da c'henel ur red tredan, an tredanread, fonnder ur red tredan.

Ar goulenn hag an argemmennoù armerzhel all.

Unan eus argemmennoù an ataladoù armerzhel meneget diagent eo ar goulenn. Kevreizh eo d'un niver a argemmennoù all.

Lakaomp ez eus n mad bevezet en ul lec'h hag en ur mare. Bezet i unan eus ar madoù-se, q_i ar c'hementad bevezet eus ar mad-se, p_i ar priz anezhañ.

Hefiveldra evit ar madoù all : $q_1, q_2, q_3, \dots, q_n$.
 $p_1, p_2, p_3, \dots, p_n$.

Ar goulenn eus ur mad i gant ur bevezer zo enta kevreizh d'ar prizioù eus ar mad-se hag eus ar madoù all war un dro hag, ouzhpenn-se, eus korvoder k_0 ar bevezer :

$$q_i = f(p_1, p_2, \dots, p_n, k_0).$$

Kevreizhenn ar bevezadur zo enta ur gevreizhenn dezhi $n + 1$ argemmenn. Gwelout a reer pegen kemplezh eo ar rifverezh armerzhel.

Er pleustr ez en rener a daoladoù : disrannañ a reer an argemmennoù, o sellout ouzh an holl nemet unan evel digemm da bep taolad.

Ar bevezadur kevreizh d'ar c'horvoder

D'ar c'hentañ sell e verzer ez eo ur gevreizhenn gengresk : bep ma kresk ar c'horvoder e kresk ivez ar bevezadur.

Kestouegezh ar gevreizhenn bevezadur-korvoder.

Gwelet hon eus c'hoazh keal ar gestouegezh (5).

Bep miz e prenan 6 F bara hag 1 F gwin fin ent-keitat. Mar sav ar c'horvoder eus 1 000 F da 2 000 F, e krogin da brenañ 6,5 F bara ha 20 F gwin fin. Mar diskenn va c'horvoder eus 1 000 F da 800 F, e teuin da brenañ 5,9 F bara ha 0 F gwin fin.

Evel a weler, va bevezadur bara ne heuilh ket, ne "stou" ket koulz lavaret pa gemm va c'horvoder; bihan eo e gestouegezh. En enep va bevezadur gwin fin a ziskouez bezañ kizidik-kenan ouzh kreskoù pe zigreskoù va c'horvoder; bras eo e gestouegezh.

Lakaet eo bet ar gestouegezh e stumm ur rifvenn, da lavarout eo en ul lavar jedoniell. Bezet ar gevreizhenn $y = f(x)$, - x o vezañ amañ ar c'horvoder, y ar bevezadur. Kestouegezh ar gevreizhenn y e-keñver an argemmenn x zo :

$$S_{y/x} = \frac{dy}{y} : \frac{dx}{x} = \frac{dy}{dx} \frac{x}{y} = \frac{d(\log y)}{d(\log x)}$$

Ar rifvennoù dx ha dy a anver orgemmoù, da lavarout eo kemmoù ouzh an or (trahihanennoù int); ar c'heñver etrezo

$\frac{dy}{dx}$ a vez anvet keñver orel pe orgemmel (naouegenn ar gevreizhenn $y = \frac{1}{x}$ eo). Ar rifvenn $\frac{y}{x}$ a anver keñver keitat.

En degouezh a studiomp (y bevezadur, x korvoder), ez anver ar c'heñver orel : doug orel da veveziñ, hag ar c'heñver keitat : doug keitat da veveziñ.

Doareoù ar gestouegezh.

Adkemeromp rifvenn ar gestouegezh, oc'h erlec'hiañ an arouezioù Be ouzh y ha Ko ouzh x : $S = \frac{dBe}{dKo} \frac{Ko}{Be}$. Ha kemeromp an daou zegouezh:

a) Gerren a ra ar c'horvoder ($dKo > 0$). Kreskiñ a ra ivez ar bevezadur ha muiel eo dre-se ar c'heñver $\frac{dBe}{dKo}$. Anvet e vez ar c'heñver-se feur deledusted ar bevezadur, Fd.

b) Gouziñ a ra ar c'horvoder ($dKo < 0$). Digreskiñ a ra ivez ar bevezadur ha muiel e chom ar c'heñver $\frac{dBe}{dKo}$. Anvet e vez ar c'heñver-

se feur moustradusted ar bevezadur, Fm.

Merzout a reer pa studier an daou feur Fd ha Fm en ur boblañs, e vez bepred $F_m < F_d$. Da lavarout eo e kresk buanoc'h ar bevezadur pa c'horre ar c'horvoder eget na zigresk ar bevezadur pa c'houziz ar c'horvoder. An anadenn-se, anvet gwered an drezenn, drezennegezh, (Sz.: ratchet effect), a ziskouez o devez an dud diegi o tilezel ur gwelladur ur wech gounezet. Ar gwered-se, anezhañ un harzder breidel d'ar gouzizañ, a gaver alies o c'hoari er gwikefreoù armerzhel ha kevredigezhel.

Penaos e telunier anadennoù ar gestouegezh.

Da gentañ e reer un enklask war arc'hantroll un niver a diadoù en holl gendereoù ar boblañs.



Pep taol enklask a ro an tu da savelañ sifr ur c'horvoder ha sifr ar bevezadur studiet (pell-oc'h e welimp penaos e vez rannet ar madoù-beveziñ). An div werzhad-se a zouger war ur reizhiad daou ahel kenserzh hag e termener evel-se ur poent a zo dezhañ da zaveennoù an div werzhad-se korvoder, bevezadur.

A-benn an diwezh e tegouezher gant un niver bras a boentoù delunius pe, evel ma lavarer, ur gronn stadegel. Disneuz a-walc'h eo ar gronn-se, nemet e c'haller evelkent diverzout dezhañ un neuz astennet (Sk. 1).

Ar gudenn eo reiñ d'ar stlennadoù douget gantañ ur stumm riñvoniell ha da gentañ mentoniell.

Da gentañ e verker en e greiz ur poent M, anvet poent keitadel, dezhañ da zaveennoù ar c'horvoder keitat hag ar bevezadur keitat evit ar boblañs imbourc'het a-bezh.

D'an eil e treser a-dreuz d'ar gronn un eeunenn savlec'hiet hevelep ma ve ar bihanañ gwellañ sammad ar pelladur diouti eus an holl boentoù. An eeunenn geitadel,



pe keitadenn, a reer anezhi. Graet e vo outi evel ouzh delun jedoniel ar gromm stadegel.

Hervez an dro e vo tri savlec'h d'ar geitadenn, diouzh ma skejo ahel an hedennoù a-us d'ar poent O, d'ar poent O, pe a-is d'ar poent O (Sk. 2).

Sellout a reer ouzh ur c'horn α , etre ar geitadenn hag ahel al ledennoù, hag ouzh ur c'horn β , etre OM hag ahel al ledennoù. Ar riñvennoù : $tg\alpha$ ha $tg\beta$ a verk enta naou ar geitadenn ha naou an eeunenn OM. Mar daveer ouzh an displegadurioù diagent, e verzer ez eo $tg\beta$ an doug keitat da veveziñ, ha $tg\alpha$ an doug orel da veveziñ er poent M. Dre-se, ar gestouegezh er poent M a zo he riñvenn :

$$s = \frac{tg\alpha}{tg\beta}$$

a) Pa vez $\alpha < \beta$, e vez $tg\alpha < tg\beta$, alese $s = \frac{tg\alpha}{tg\beta} < 1$.

Tro bevezadur ar madoù bevañs eo. Pa c'horre korvoder ur pinvidig, ne gresk ket ken e vevezadur bevañs. Pa c'horre korvoder un tavanteg, e laka hogos holl werzh ar gorreadur da greskiñ e vevezadur bevañs. Amgestouek eo bevezadur ar madoù bevañs (saveleñn ENGEL).

b) Pa vez $\alpha = \beta$, e vez $s = 1$. Hervez an armerzhourion glasel e ve eno tro an dispignoù "oaled" (annezadur, tiaveañ, gouloù, tommerezh). Pa greskfe ar c'horvoder eus 10 % e kreskfe enta an dispignoù-se eus 10 % ivez. Hiziv avat ez a an dispignoù oaled er rumm a) kentoc'h. Pa vez $s = 1$, e komzer eus hegestouegezh.


k) Pa vez $\alpha > \beta$, e vez $s > 1$. Er rumm-mañ emañ ar madoù a lorc'h, dreistezhomm. Pa c'horre ar c'horvoder, e kresk a-dizh ar bevezadur anezho; pa c'houziz, e vezont aberzhet ar re gentañ. Hag e lavarar ez eo dreistkestouek pe kestouek-tre ar bevezadur anezho.

Damkaniezh an diuzoù

Diazezet eo an damkaniezh-mañ war arlakaat e c'haller muzuliañ ar barr-goulenn dangorel. D'henn ober e prizier bastusted ar madoù, hag e poellataer evel-henn : o vezañ ar genaou A = 0,5 kg kig + 1 l gwin, pe gementad gwin x a ranker kemer evit ma vo ar genaou B = 0,25 kg kig + x l gwin ken bastus hag ar genaou A. Lakaomp e ve kavet 3 l gwin. En doare-se e c'haller empentiñ un heuliad kenaozioù ken bastus ha ken bastus ha tresañ ur grommenn o teluniañ ar c'hementadoù kig hag ar c'hementadoù gwin. Ar grommenn-se a anver ur geitvastuzenn.

Ne c'hellomp ket diskouez amañ an arverioù a denner eus ar c'heitvastuzennoù. Talvout a reont da veizañ penaos e ra ar bevezer

e ziuzoù e-touez an holl vadoù kinniget dezhañ, diouzh m'eo c'havo bastus pe vastusoc'h, a-gevreizh ivez evel just gant e gorröder. E-se, hervez an arc'hant a c'hell dispign e vo fonnusoc'h pep elfenn eus ar c'henaozioù, ha treset e vo meur a geitvastuzenn. Ar gartenn a saver en doare-se a vez anvet ur geitvastuzeg (Sk.3).



Sk. 3.

Ar goulenn kevreizh d'ar priz

Er rihvenn hollek $q_i = f(p_i, K_0)$, hon eus studiet an argemmoù a-gevreizh gant K_0 , eleze ar gevreizhenn $Be = f(K_0)$.


Bremañ e raimp un disrannadur all hag e studiimp ar gevreizhenn $q_i = f(p_i)$, eleze ar goulenn, ar bevezadur kevreizh d'ar priz.

Evit ur mad lavaret, ouzh ur priz p e klot ur c'hementad q hevelep ma tigrsko q pa gresko p , hag ar c'hontrol. Da heuliañ ar boaz saoz-amerikan, e touger ar prizioù war ahel an hedenoù.

An deluniadur-se a c'hell bezañ unkendaveel, eleze hevelep ma'z eus ur werzhad q hag unan evit pep gwerzhad p .

Peurliesañ avat ez eo lieskendaveel, eleze hevelep ma'z eus meur a werzhad q evit pep gwerzhad p . Ar "grommenn" neuze a gemer stumm ur vandenn, - komz a reer eus krommenn duzum.

Amañ eo dav menegiñ un anaden anvet gwered ar snobegezh (snob effect) : tud zo, a-benn en em zigemmañ diouzh ar gumun, a bren muioc'h pa gresk ar priz.



Sk. 4.

Anadennoù all a c'haller stadañ en darempredoù etre ar prizioù hag ar goulennoù :

Gwered Marshall, pe gwered an erlec'hiañ. Pa c'houziz priz ur mad i, e kresk ar goulenñ warnañ hag e tigresk da heul ar goulenñ war ar madoù all, daoust ma n'eo ket kemmet o frizioù. Ar mad i a denn da gemer lec'h ar madoù all.

Gwered Hicks, pe gwered ar c'horvoder. Pa c'houziz priz ur mad i, e chom dieub ul lodenn vrasoc'h eus korvoder ar brenerion hag e c'hellont neuze enlenañ al lodenn-se ouzh kementadoù brasoc'h eus ar madoù all.

Degouezhioù diseurt a vo enta hervez ma c'hoario mui pe vui gwered an erlec'hiañ pe wered ar c'horvoder.

Diac'hinad Giffen. Giffen, armerzhour saoz, en doa merzet e kreske bevezadur ar bara er mareoù end-eeun ma c'horree priz ar bara. Gant gorreadur priz ar bara e tigreske korvoder al labourerion, na oant ket gouest ken da brenañ kig, hag a brene neuze muioc'h a vara.

Kestouegezh ar gevreizhenn bevezadur-priz.

Heñvel eo ar jedadur ouzh jedadur savelañ kestouegezh ar gevreizhenn bevezadur-korvoder; degouezhout a reer gant ar riñvennoù :

$$\text{Kestouegezh : } S' = -\frac{dBe}{dP} \frac{P}{Be} = -\frac{d(\log Be)}{d(\log P)}$$

$$\text{Doug keitat da c'houlenn} = \frac{Be}{P} \cdot \text{Doug orel da c'houlenn} = \frac{dBe}{dP} \cdot \text{Prizioù}$$

Bezot ur grommenn c'houlenn diforzh (Sk.5), hag ur poent P anezhi. E vit jediñ kestouegezh poentel ar goulenñ, e treser ur spinenn PR d'ar grommenn er poent-se, hag an eeunenn OP. Bezot α ha β kornioù an div eeunenn-se gant ahel ar prizioù.

Dezren a c'haller :


$$\text{tg } \alpha = -\frac{dBe}{dP} ; \text{tg } \beta = \frac{Be}{P} ;$$

$$\text{alese } \frac{\text{tg } \alpha}{\text{tg } \beta} = S' \text{ er poent P.}$$

Heñveldra e studier meur a zegouezh :

a) $0 < |S'| < 1$: goulennoù dipe amgestouek :

- 1) ar madoù ret-holl, evel ar bara;
- 2) madoù prenet a gementadoù bihan, ar pebr da skouer;



Sk. 5.

Compt

3) ar madoù emglokaus; ar barrikennoù da skouer a vez prenet diouzh kementad ar gwin da enderc'hel, ha n'eo ket a-gevreizh d'o friz;

4) ar madoù a lorc'h bras, prenet hepken gant arvalion binvidik.

b) $1 < |S| < \infty$: goulennoù kestouek-tre :

1) ar madoù direkt;

2) ar madoù prenet gant arvalion ar c'hendereoù-etre. Ar c'hendereoù pinvidik a bren diouzh o ezhommoù hag o c'hoantoù hep sell-out ouzh ar priz; ar c'hendereoù tavantek a bren madoù ret dreist-holl ha n'int ket evit derc'hel kont eus ar priz;

3) ar madoù erlec'hiet : mar kresk re priz ar gwin, ez ay da get bevezadur ar gwin, erlec'hiet ma vo ar bier outañ.

Ar c'hinnig.

Kevreizhenn ar c'henderc'hadur

Gwelet hon eus e oa teir elfenn d'ar c'henderc'hañ : al labour, an natur, ar c'hevala. Ar saoznegerion a ra dre vras "inputs" (enodoù) eus an teir elfenn-se, a vez taolet e-barzh (en-odet) an unvez-kenderc'hañ; hag, a-geñver, e reont "outputs" (ezodoù) eus ar madoù kenderc'het.

Ar rihverezh armerzhel a vo enta e amkan lakaat a-wel ar c'heñverioù a zo etre enodoù hag ezodoù, ha merkañ da heul ar c'henaozioù gwellek da gaout etre elfennoù ar c'henderc'hañ.

Diaes eo avat embreger teir argemmenn war un dro. Dav e vo enta disrannañ aze ivez. En ur prantad kentañ e seller ouzh div elfenn hepken, hag e lakaer unan anezho da argemmañ, eben o venel digemm. Evel-se e c'haller dresañ un daolenn geñveriañ elfenn argemmek-kenderc'h.



Kemeromp da skouer ur gorread douar lavaret, ha lakaomp niver ar wezhourion da argemmañ.

Unanennoù douar (elfenn digemm)	1	1	1	1	1	1	1	1	1	1	1
Gwezhourion (elf. argemmek)	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
Kenderc'h hollel	0	40	90	145	200	230	260	280	290	295	295
Kenderc'h orel an elf. argemmek	0	40	50	55	40	35	30	20	10	5	0
Kenderc'h keitat an elf. argemmek	0	40	45	48,3	50	46	43,3	40	36,2	32,7	29,5

Kenderc'h hollel, kenderc'h keitat, kenderc'h orel.

Diwar an daolenn diagent e c'haller sevel krommennoù o tiskouez argemmoù an teir c'hevreizhenn : kenderc'h hollel, kenderc'h keitat, kenderc'h orel (Sk. 6).

N'omp ket amañ evit menegiñ an holl stlennadoù a denner eus studi ar c'hrommennoù-se. Merkomp hepken ez adkavomp c'hoazh saveleñn an askoradoù war zigresk (6) : pa gresk un elfenn, an div all o chom digemm, e tremen krommenn an askoradoù dre un uspoent, ha se buan a-walc'h.



Sk. 6.

Koust ar c'henderc'hañ

Pouezus eo studiañ kevreizhenn ar c'houst e-keñver ar c'hementadoù kenderc'het : $C = f(Q)$.

Un diforc'h a reer etre ar c'houst war verr dermen hag ar c'houst war hir dermen.

Keal ar berrdermen a empleg ne gemm ket aveadur na ment ar firm er prantad studiet. Degas a reer amañ ur selladur a adkavimp pell-oc'h : ment an embregerezh lec'hiet war ur skeul ha kemeret da elfenn riñverezh armerzhel.

Keal an hirdermen a empleg treuzfurmadurioù er stern, en aveadur, e ment an embregerezh. Lakaet e vo e kont ar postadurioù nevez gouestlet da greskiñ ar vent ha da arnevesaat ar c'hevvala hag ivez kresk an askoradoù dre berzh un urzhiataerezh diorreet.

Dezrannadur ar c'houstoù war verr dermen.

Savelañ a reer da gentañ an teir c'hevreizhenn :

a) Koust hollel. Pa genderc'h ur firm 100 traezenn, pegement e koust an hollad anezho ? Ar c'houst hollel C_h a studier evel kevreizhenn ar c'hementad kenderc'het q : $C_h = f(q)$.

b) Koust keitat. Pegement e koust an unanenn genderc'het ? Ar furm-

mañ zo d'ar gevreizhenn : $C_k = \frac{f(q)}{q}$.

k) Koust orel. Pegement e koust ar 100t traezenn pa genderc'her 100, ar 101t pa genderc'her 101t, h.a.? E gerioù jedoniezhel, ez eo ar c'houst orel naouegenn ar c'houst hollel : $C_o = f'(q)$.

Un doare all zo da zezrannañ koust ar c'henderc'hañ : e zielfennañ e rummoù diouzh ma argemm pe get ar rummoù-se a-gevreizh d'ar c'henderc'hadur. Evel-se e tistranner :

a) Ar c'houstoù digemm. Evit ur vent lavaret eus an embregerezh ez eus ur sav mizoù hollek dizalc'h diouzh ar c'henderc'hadur e-unan : feurmoù, kretadurioù, gouloù ha tommerezh, telloù 'zo, ardaladur, amprestoù, h.a.

b) Ar c'houstoù kenfeuriek zo, evel ma verk an termen, kenfeuriek d'ar c'hementadoù kenderc'het : priz an danvezioù krai da skouer.

k) Ar c'houstoù kemmus. Ar grommenn o verkañ argemmoù ar mizoù-mañ a-gevreizh d'ar c'henderc'hadur n'eo ket un eeunenn evel ar c'hrommennoù o teluniañ argemmoù an daou rumm kentañ, met ur grommenn gemplezh. E-touez ar c'houstoù kemmus emañ priz al labour; pa gresk niver ar vicherourion en ur firm, pep tra o chom kevatal a-hend-all, ez eus ur poent, anvet poent gwellek, ma vez an askorad keitat dre vicherour en e uhelañ hag ar c'houst keitat dre vicherour en e izelañ; a-is hag a-us d'ar poent-se e kresk ar c'houstoù.

Tresañ a reer ivez krommennoù ar c'hevreizhennoù C_h , C_k , C_o hag o studiañ en hevelep doare ma studier krommennoù ar c'henderc'herc'h (kv.Sk.6). En hevelep doare e treser krommennoù ar c'houstoù digemm hollel, keitat hag orel; kenfeuriek hollel, keitat hag orel; kemmus hollel, keitat hag orel. Evit diforc'hañ ar c'houstoù darnel-mañ diouzh o sammadoù C_h , C_k , C_o , ez anver C_h koust kevan hollel, C_k koust kevan keitat, C_o koust kevan orel.

Keitkenderc'hennoù ha keitkoustennoù

Ur gudenn eo gouzout penaos kenaozañ ar c'hementadoù labour ha kevala pe, e gerioù all, petore kenaozioù labour ha kevala a glot gant ur c'henderc'hadur lavaret.

Ur gudenn heñvel hon eus studiet e-keñver ar bevezadur. Kromm-


ennoù heñvel a-walc'h ouzh ar c'heitvastuzennoù a dreser, anvet keitkenderc'h ennoù.

Un diforc'h rifvoniell zo koulskoude : ar vastusted ned eo ket muzuliadus, met merkadus (ne c'haller ket ober sammadurioù na lamadurioù ganti; lavarout a reer hepken ez eo bastusoc'h d'un den ur genaot vadoù eget unan all, hep bezañ e-tro evel just da verkañ ur c'heñver niverel etre an div); muzuliadus eo er c'hontrol ar c'henderc'hadur. Pep keitkenderc'henn a glot ouzh ur c'hementad kenderc'het resis : tonennoù ed, metroù gwiad, reoù botoù, h.a.


Daou zoare zo da stigmañ ar c'heitkenderc'h ennoù : war ur blaenenn, ouzh daou ahel kenserzh, hag e tisoc'her neuze gant ur gartenn, anvet ur geitkenderc'heg; pe war un ec'honenn, ouzh tri ahel kenserzh, an trede ahel, hini ar savennoù o tougen ar c'henderc'hadurioù, hag e tisoc'her neuze gant ur c'horreenn, a anver gorreenn-deluniañ ar c'henderc'hadur pe, ent-verr, gorreenn genderc'h (Sk.7). Emañ enni an holl geitkenderc'h ennoù e stumm ar c'hrommennoù-skej etrezi ha plaenennoù kensur d'ar blaenenn savelet gant an daou ahel all.

Notomp ez eus tu ivez da sevel en hevelep doare gorreenn-deluniañ ar vastusted pe, ent-verr, gorreenn vastusted, met hep ankouaat e verk savennoù seurt gorreenn priziadurioù dangorel hepken.

Penaos arverañ ar c'heitkenderc'h ennoù ? Ne verkont nemet ar c'henaotadurioù gallus a labour hag a gevala o tisoc'hañ gant kenderc'hadurioù dibabet. Ne verkont ket avat ar genaot wellañ. Houmañ zo da vezañ kavet dre lakaat e kont koustoù an elfennoù. Evit ur sav arc'hant lavaret e c'haller deluniañ ar c'henaotadurioù gallus a labour hag a gevala, diouzh ar gevreizhenn : $y = A - x$ (A : sav arc'hant lavaret; y : koust ar c'hevala; x : koust al labour). Un eeunenn eo neuze ar grommen-deluniañ (Sk.8);



Sk. 7.




Sk. 8.


anvet e vez keitkoustenn; mar dibaber ur sav arc'hant all uheloc'h A_2 , e tegouezher gant ur geitkoustenn all, kenstur d'an hini gentañ. Ur gartenn geitkoustennoù a anver ur geitkousteg.

Tu a zo da gensevel ouzh an hevelep ahelioù ar geitkenderc'h hag ar geitkousteg. Un tamm poellata a ziskouez ez eo ar poentoù spin etre ar c'heitkenderc'henoù hag ar c'heitkoustennoù a verko an dasparzh gwellañ etre labour ha kevala pe evit ur c'houst hollel lavaret pe evit ur c'henderc'hadur lavaret (Sk.9).

Pouezus-bras eo enta ren an enklaskoù-mañ. Kemeromp skouer un embregerezh war greskiñ. Fellout a ra dezhañ gouzout pegoulz ha penaos kreskiñ e gevala diouzh un tu, e goskor diouzh an tu all. Talvoudus e vo dezhañ kemer titour gant ar geitkrommeneg koust-kenderc'h a ziskouezo dezhañ savlec'h ar poentoù gwellek, da lavarout eo an dasparzh gwellañ da reiñ d'ar c'houstoù labour ha kevala evit pep prantad eus e emastenn (Sk.10). Tresañ a c'haller ul linenn dre ar poentoù gwellek war ar geitkrommeneg; anvet e vez ribin an emastenn, peogwir ez eo an hent spletusañ a c'hell ar firm heuliañ evit ren e greskidigezh.



Sk. 9.



Sk. 10.

Armerzhegezh diouzh ar skeul

Betek-henn hon eus studiet ar pezh a dremene en un embregerezh lavaret, dezhañ ur vent lavaret. Klasket hon eus termenañ amplegadoù an askorad gwellek hep lakaat e kont en hor jedadurioù ar vent, bihan, etre pe vras, o deus an embregerezhioù. Anat eo koulskoude ne jeder

ket sifroù ur firm dre n-kementiñ sifroù ur firm all n gwech bihan-oc'h egetañ.

Ar gudenn eo neuze ar vent wellek a zo da reiñ d'un embregerezh evit ma savfe e askorad d'an uhelañ, evit ma'z afe en-dro en doare armerzhekañ. Stignet ha studiet eo bet ar gudenn-se gant A.MARSHALL, ha termenet gantañ evel hini an askorusted diouzh ar vent, pe an armerzhegezh diouzh ar skeul, - ar ger "skeul" o vezañ intentet amañ er ster en deus da skouer pa gomzer eus skeul ur gartenn douaroniezh.

Didermenañ a reer ar vent armerzhekañ evit pep ijinerezh. "Bras a-walc'h eo ar marc'had suis da reiñ fred e prizioù kevezus da ijinerezh an armelioù-yen; re enk eo avat da reiñ fred da ijinerezh an tangirri. E Frañs hag Alamagn e c'hell bezañ armerzhek un ijinerezh broadel eus an tangirri, met n'emañ ket ken ar marc'hadoù gall nag alaman diouzh skeul an ijinerezh aerlestrel ha setu perak e tiwan embregerezhicù etrevroadel" (L.ARMAND).

Ret eo merkañ evelkent ned eo ket ar firmoù brasañ ar re armerzhekañ. Kreskiñ a ra an armerzhegezh gant skeul an embregerezh, dre an arbenn dreist-holl ma ne c'hell an urzhiataerezh (7) reiñ e holl frouezh nemet en unvezioù-kenderc'hañ bras. Pa zeu avat ar firm da vezañ re vras e tiwan displetoù nevez : laosk e teu ar reolerezh da vezañ, kreskiñ a ra ar c'houfonadur, amrediek fall a ra ar stlenn. Krommenn an armerzhegezh diouzh ment ar firm a dremen enta ivez dre un uspoent; en tu all d'an uspoent-se e tegas pep kreskadenn nevez, n'eo ket ken kresk, met digresk armerzhegezh pe, evel ma lavarar c'hoazh, diarmerzhegezh.

Ledanaet eo bet kealioù an armerzhegezh hag an diarmerzhegezh. Enebiñ a reer an armerzhegezh skeulel diabarzh (a-geñver gant ar spletoù a denn ur firm eus e vent) ouzh an armerzhegezh (skeulel) diavaez (a-geñver gant ar spletoù a denn un embregerezh eus embregerezhioù all). Ar Stad, oc'h aozañ an aveadur-diazez, an hentoù da skouer, ar firmoù brasañ, o ren un imbourc'h gouiziel ha kalvezel a dalvezo goude-se d'an embregerezhioù bihan, a vez pourchas-erion armerzhegezhioù diavaez.

Ar c'hinnig kevreizh d'ar priz

Ar c'hinnig a studier en hevelep doare ma studier ar goulenn.

Evel-henn emañ ar wikefre voasañ : pa c'horre priz ur varc'hadourezh, e tenn ar gwerzher da ginnig kementadoù brasoc'h; pa c'houziz ar priz, e tenn da ginnig kementadoù bihanoc'h.

Koulskoude e ranker derc'hel kont eus an daou wered a vez stadet pa studier ar goulenn kevreizh d'ar priz :

Gwered an erlec'hiañ. Pa c'houziz ar priz, e kav gwell ar gwerzher kinnig nebeutoc'h, o virout an dreistad da enlenadurioù all : staliadoù, arverioù e-maez nevid, h.a.

Gwered ar c'horvoder. Mar fell d'ar gwerzher tennañ kement a gorröder daoust ma c'houziz ar priz, e klask gwerzhañ muioc'h.

Ar gudenn neuze eo gouzout pegoulz e c'hoari an eil gwered pe egile. Ent-devoud, pa vez ur varc'hadourezh pouezus e vez trec'h gwered ar c'horvoder; pa vez ur varc'hadourezh eilrenk, e c'hell aozadoù all kemer he lec'h, ha gwered an erlec'hiañ eo a ren.

Kestouegezh ar gevreizhenn kinnig-priz.

Heñvel eo an hentenn-studiañ ouzh an hini arveret evit savelañ kestouegezh kevreizhennoù ar bevezadur. Disoc'hañ a reer gant ar rifvennoù :

$$S'' = \frac{dK_i}{dP} \frac{P}{K_i} = \frac{d(\log K_i)}{d(\log P)} .$$

A hevelep furm gant krommenn ar goulenn e vez krommenn ar c'hinnig (kv.Sk.5).

Diouzh derez o c'hestouegezh e c'haller renkañ ar c'hinnigoù e daou rumm :

a) $0 < S'' < 1$: kinnigoù di- pe amgestouek; an dro eo eus madoù n'o devez neuennadurioù o friz koulz lavaret levezon ebet war ar c'hementadoù kinniget, - ar madoù kollidik da skouer, evel ar pesked fresk, ar bleunioù, ar frouezh. Heñveldra, gorreadur ar prizioù ne zevoud ket diouzhtu ur c'hresk eus ar c'hinnig anezho. Er rumm-mañ e renker ivez ar c'hinnig labour.

b) $1 < S'' < \infty$: kinnigoù kestouek-tre; amañ e kaver an holl vadoù na vezont ket distreset gant an amzer, a c'hell gortoz ha bezañ gronnet e staliadoù, - marc'hadourezhioù greantel ha gounzel 'zo, ha dreist-holl ar c'hevalaoù heloc'h, an teulioù-kret, h.a.

Penaos muzuliañ kestouegezh ar c'hinnig ? An imbouro'hioù amañ n'int ket bet kaset ken pell hag an imbouro'hioù arnodel war ar bevezadur. Koulskoude, e degouezhioù e c'haller dezren kestouegezh ar c'hinnig diouzh kestouegezh ar read (da lavarout eo "kas" ar madoù a-dreuz d'an nevid). An diaester bras eo n'eus koulz lavaret nepred a ginnig pur en armerzh kempredel, - pur eleze dizalc'h diouzh levezon koust ar c'henderc'hañ.

Talvoudegezh ha bevennoù ar riñverezh armerzhel diwar ar c'heit-krommennoù.

Dezvarn a zleer talvoudegezh ar riñverezh armerzhel evel m'hon eus e dermenet en notennoù-mañ, da lavarout eo er par korrgantel, hini an unvezioù-kenderc'hañ. Evitañ da gaout ur stumm jedoniezhel, arabat e ve grataat dezhañ un dikted fizikel. Burutellañ a raimp lerc'h-ouzh-lerc'h ar furm roet gantañ da arbennoù an armerzhidi, da elfennoù ar c'henderc'hañ, d'ar frankiz nevidel.

a) Arbennoù an armerzhidi. A-douez an arbennoù o c'hoari e divizoù an armerzhidi, kenderc'herion ha bevezerion, ne zalc'her nemet an arbennoù armerzhel rik, hag e lezer a-gostez al luskennoù all, politikel, kevredadel, tiegezhel, hag int kreñv pe greñvoc'h.

Goulakaat a reer ivez ez eo an armerzhiad reizhpoellek en e zivizoù hag en e ziuzoù, ar pezh nad eo ket gwiriet bepred.

Koulskoude e ranker degemerout dre vras e fell da bep embreger ober berzh ha da bep bevezer ren e arc'hantroll diouzh ar gwellañ, ha gwelout aze arbennoù kreñv a-walc'h evit ma tennfe ar braz eus an armerzhidi da ersaviñ evel ma c'hortozer ez ersavfent diwar savelennoù ar riñverezh armerzhel. Hag, evit gwir, ar re-mañ dre vras zo kevazas ouzh an devoudoù evel m'o arseller.

b) Elfennoù ar c'henderc'hañ. Ar riñverezh armerzhel a c'houlaka ez eo herann an elfennoù dewerzhed en e ser. Ne c'haller ket avat poellata war hanteroù karr-nij pe vicherour. Seurt diaester a steuz koulskoude pa dremener e par ar firmoù bras ha, seul well a se, er par meurgantel.

k) Frankiz an nevid. Ar riñverezh armerzhel dre ar c'heit-krommennoù a ampleg ar frankizouriezh rik. Hogen, koulz lavaret e nep lec'h er bed ne gaver mui a frankizouriezh rik : e pep bro ez emell ar Stad muioc'h pe nebeutoc'h e leviadurezh an armerzh.

-
- (1) Sl. Emsav 7/178.
 - (2) Sl. Emsav 7/185.
 - (3) Sl. Emsav 15/84.
 - (4) Das Kapital I,1,III.
 - (5) Sl. Emsav 10/280.
 - (6) Sl. Emsav 10/268,271.
 - (7) Sl. Emsav 7/179.
-

